


# EMBANNADURIOU ABER

ABER 115 Kergareg F.29870 Landeda

[pkermoal@wanadoo.fr](mailto:pkermoal@wanadoo.fr)

[www.aber-bzh.info](http://www.aber-bzh.info)



## A-youl ar Gwent, Pierrette Kermaol

Arnodskrid diwar-benn *Barzhonegoù*, gant Roparz Hemon  
«*Ha ne welez ket a-vern/E frailh ar voger aour a dorr,/ Listri da huñvre war ar mor ?*»

Ur vag o skeiñ etrezek an donvor, an heol o vont da guzh. Ha setu ma tigor ar voger aour war weledigezh splann ur bed dianav... Mare bresk ha berrbad ar c'hrouiñ.

**A-youl ar Gwent** a ginnig d'al lenner dizoleiñ bed ar barzh hag e zodennoù diazez : an avel, an arvont, an troc'h, an digoradur, an hunvre, gwengeloù iwerzhonat adwelet, ar c'hloaz en e ene, hiraezh an harluad, hag ivez erotegezh barzhonegoù Gawain, ha, bepred, atersoù ar c'hrouer...

A-youl ar Gwent, 263 p., 14 x 20, Gouere 2009 - 15 €

ISBN : 978-2-916845-06-7



## Dre Lennegezhioù ar Bed,

Dastumad arnodskridoù gant :

Marie-France Coïc, Joelle Kermaol-Furic, Tangi Legavre, Gwenael Maze, Morgan ar Menn, Yann-Ber Quirion, Jakez Tomaz.

Ur gantreadenn lennegel dre ar bed, eus Breizh betek Japan, sed a ginnig aozerion an dastumad-mañ, c'hoant ganto rannañ gant lennerion all plijadur un dizoloadenn pe ur fromadenn.

268 p., 14x20– ISBN 978-2-916845-04-3

15€

Gwengolo 2008



## Hunvre, d'an Hollsent

Danevell e meur a daolenn

Gant Pierrette Kermaol


“... E ’m skouarn e tassion heklek he mouezh.”

Gant heklek ar vouezh anavezet, e tibun an danevell ; taolennoù ur bed ma ren tro-ha-tro kened espar ar mor ha reuzeudigezh rukunus ; ur bed ma wisk ar feulster neuz ar gened, marteze, en ur skrid doues, fromus ha goustavek, a ya dreist da reolennoù ar glaselezh lennegel.

96 p., 14x20 – ISBN 978-2-916845-05-0

10€

Here 2008



## A-HED AR PANAMERICANA, gant Jorj Abherve-Gwegen

An Andoù, livenn-gein Suamerika. En amzerioù a-raok ar Spagnoled, sez an Impalaereded Inka. An domani-mañ en deus Jorj Abherve-Gwegen ergerzhet e zaou benn : Ekouador ha Chile. Gant kirri-boutin, eus an harzoù gant Kolombia betek Chiloe, enezenn voemus su Chile.

Iskisat douaroù, Andoù Ekouador : a-'haoliad war ar c'heheder ha, daoust da se, erc'h o c'holeiñ o c'hribennoù.

Ha Chile, pimpatrom Europa ? Koulskoude... pa'z eer un tammig war glask, ne zale ket ar sichenn indian da zont war wel.


222p., 14x20, dek skeudenn e liv, div gartenn

15€

Here 2007

## TANGI KERVILER,

gant Roparz Hemon (adembannadur)



Digoradur gant Pierrette Kermoal

Romant istorel o c'hoarvezout e Breizh da vare an Dispac'h gall ? Romant karantez ? Romant deskoniadur ? Petra eo resis an oberenn-mañ ?

« Ne ran amañ nemet istorig Tangi Kerviler », eme ar benndudenn. D'al lenner d'ober e soñj...

141p., 14x20

10€

Mezheven 2007

## SKLEUR EN NOZ,

gant Pierrette Kermoal

Dastumad danevelloù, Kevellennoù, kontadennoù, barzhoniezh...



Dek testenn ganto frond ar mor.

E bed Pierrette Kermoal, etre faltazi ha beziadoù, e striv an tudennoù da vont dreist d'an dic'hallusted. Ha dont a reont a-benn, gant poan hag hir amzer a-wechoù, met bepred gant humour, fent, hag ijin. Pe marteze hepken dre nerzh hud al lavar ?...

182 p., 14 x 20

10,50 €

Here 2006

## LIORZH AL LENNEGEZH

En ur film brudet en e vare, e weled ur c'helenner oc'h erbediñ d'e studierion sevel war an daol, a-benn teurel war ar bed ur sell disheñvel.

Ur sell disheñvel war al lennegezh vrezhon, (hep na vo ret d'al lenner sevel war an daol, nemet e ve e blijadur), savboentoù nevezus : setu pezh a ginnig Pierrette Kermoal gant an daouzek arnodskrid-mañ, ma tiskouez penaos skrivagnerion e-touez ar re bennañ - Abeozen, Youenn Drezen, Roparz Hemon, Kervarker, Meavenn, Jakez Riou... - o deus meret en o oberennoù kudennoù loskusañ ar gevredigezh en o amzer... hag en hon hini.

Skridvarnerezh 246 p., 14 x 20,

13 €

Here 2006,

